

Fañch an Uhel : Plouared 1821 – Kemper 1895)

## An daou dort (Kontadennou ar bobl en Breiz-Izel) Yez Treger

(Modernnaet eo bet an doare-skriva).  
Al liesteriou e **-ou** a zo **-o** e tregerieg.  
Ne vez ket greet ar hemmadur D/Z e tregerieg.

Eur wez e oa daou dort, Nonnig ha Gabig, hag e oant mignoned o-daou. Kemenerien e oant o-daou, ha bemdez eh eent da labourad d'an tiegeziou war ar mêz, pep hini en e du. Eun noz, pa oa Nonnig o tistrei euz e devez, diwezad eun tammig, degouezet<sup>1</sup> en lann Penn-ar-Rohou, e klevas mouezigou o kana evel-henn :

Dilun, dimeurz ha dimerher.

« Daoust piou a zo o kana evel-se ? », a laras ennañ unan. Hag e tostaas, goustadig. Sklêr e oa al loar, hag e welas an dañserien-noz, ar re<sup>2</sup> a zo kornadoned, krog daou-ha-daou, o tañsal en kelh hag o kana. Unan a gane a-raog ;

Dilun, dimeurz ha dimerher.

Hag ar re all oll a gane war e lerh :

Dilun, dimeurz ha dimerher.

Ha ne larent nemed se. Nonnig en-devoa klevet aliez komz euz an Dañserien-Noz, med biskoaz n'en-devoa gwelet aneze, hag en em guzas 'dreg eur rohell evid selled oute. Med gwelet e oe prestig, ha tapet en-kreiz ar helh. Hag i neuze da dañsal ha da drei en-dro dezañ, ha da gana gwaz evid biskoaz :

Dilun, dimeurz ha dimerher !

Ha da lared da Nonnig : « Deus da dañsal ganim ivez ! »

Nonnig ne oa ket eur paotr aonig, hag eh eas en dañs ; ha setu hañ da drei ha da gana gante :

Dilun, dimeurz ha dimerher !

« Ha goude ? », a laras ; « gwall-verr eo ho son. »

« Nan eus ken », a larjont dezañ.

« Penazo nan eus ken ? Perag ne laret ket ivez :

Ha dizio<sup>3</sup> ha digwener ? »

« Ya avad ! » a larjont oll. »se a zo brao kaer. »

Hag i da gana neuze :

Dilun, dimeurz ha dimerher,

Ha dizio ha digwener !

Ha da vond en-dro, en-dro !

Pa hoantas Nonnig mond kuit, e larjont an eil da egile :

« Petra a rofom d'an den-mañ, evdi beza hirraet ha braoet on zon ? »

« An dra a garo ; arhant hag aour kement ha ma karo, pe bez didordet. »

« Mar karet ma didorda avad, a laras Nonnig, ne houlennan diganah. »

Ha kerkent e oe lamet e dort dezañ, hag e tistroas d'ar gêr skañv hag eeun, ha zoken eur paotr koant.

An deiz-war-lerh, pa welas e vignon Gabig anezañ, e oe souezet.

« Petra, emezañ... », hag e selle euz e gein.., « ha da dort ? »

---

<sup>1</sup> degouezet : digouet e tregerieg.

<sup>2</sup> ar re : pere, er skrid orin.

<sup>3</sup> dizio : diriaou.

« Eet kuit, evel a welez. »

« Penaoz eo c'hoarvezet kement-se ? »

Hag e kontas dezañ evel ma oa c'hoarvezet an dra.

« A ! me 'aio ivez emberr da noz da Benn-ar-Rohou, da weled an dañserien-noz. »

Hag e reas evel ma en-devoa laret. Pa arruas 'barz al lanneg, e oa adarre ar gornanded o tañsal hag o kana :

Dilun, dimeurz ha dimerher !

a gane unan da genta, hag ar re all war e lerh :

Ha dizio ha digwener !

Hag e troent, hag e lampent !

Gabig a dostaas, hag e larjont dezañ :

« Deus da dañsal ganim ivez ! »

Ha setu Gabig dorn-euz-dorn gante, ha da dañsal, ha da gana evelte :

Dilun, dimeurz ha dimerher,

Ha dizio ha digwener !

« Ha goude ? »... a laras.

« Nan eus ken ; petra, c'hwi a oar c'hoaz ? »

« Ya da ! »

« O ! larit eta, larit eta ! »

Ha disadorn ha disul !

« O ! se nan eo ket mad ! se na junt ket ! on zonig a oa koant-kaer a-raog, ha nan eo ken bremañ ! petra a vo greet dezañ ? »

« Lakaad dezañ tort egile », a laras unan.

« Ya, ya, lakaad tort egile war e hini. »

Hag e oe peget tort Nonnig dezañ war e hini, hag e tistroas d'ar gêr droug ennañ ha mezuz-braz, m'ho ped da gredi.

Hag evel-se, ar peurrest e vuhez, e rankas dougen daou veh, e hini hag hini e gamarad.

*Dastumet en Plouared gand F.M. An Uhel.*